

CANTIC

SPIRITUEL

EN HENOR DANITRON

VAR. AR GOZ IEAUDET

Var ion Noel ar Pastoret

En pep coup'et é renquer repeu

*Gloar d'ar Verc'hez &c.***T**Ad Eternel, mé o supli

da dont brema d'am exauci

ar c'hraç à houlennan da ober

eur Verz à vo spirituel

glar dar Verc'hez a dar gos y au-
det melodi d'he Map biniguet.

Mé coms de h à eur plas santel

zo situe en Bac-Leguer

en henor dar Verc'hés Vari

ar quenta illis so gret dezi

glor d'ar verchez dar gos y au-
det melodi d'he Map biniguet.

Hep choquin bro nac Etopti

àllur en Treguer emedi

an anciennan plas santel

d'ar verchez sacr mam on salver
 gloar dar verchez, d'ar goz y au-
 det melo li d'hé M ap biniguet.

Er bla daouzec à tringuent
 goude ar maro Roué ar Sent
 éroué batiffet ar Yeaudet
 en Henor d'é Vam binniguet
 gloar dar verchez, ar goz y au-
 det melo li d'hé M ap biniguet,

Dre an ali un Den santel
 é tisquennas en Breis izel
 quantan Escop en Lexobi
 Disquib Joseph Arimathi

Dre bro sos oa tremenet
 breis meur oa dar o als se anvet,
 en Montroullés é tisquennas,
 à tout en o é'houvertiffas

An Den santel-le Drenalus
 deuet a ben dré gras Iesus
 da convertiffa oll Montroulléz
 en Fé vat ac en fantelez
 Neuse é eueu en Montroullés
 un illis e'er da sant Jacques,
 A batiffan en rue ar Feunteua

000026

eur groas anvet croas al zetera
 Da Lexobi é t uas neuse
 da brezec ar guir lesen Dé
 Gras Doue dre é fern oniou
 A douché o ell calounou
 Pa voant gantan convertisset
 é favas ilis ar Yeaudet
 é cassas neuse eul Lifer
 da Hecpan Naonet St. Cler
 Sant Lin a oa Pab dar ouls se
 er guer a Rom dre ur Doue,
 en desoe joa bras o chvoet
 é oa Drenalus er Yeaudet
 Revelet a re ma Doue
 dan tri den fantel bemdé
 presc dar bopl ar guir lesen
 ac ar Religion christen
 Vitellus a voa ive
 Ampereur e Rom dar houls se
 ac a vassacré ar cristenien
 abalamour d'o guir lesen
 Goude an Tirant se e reuas
 Ampereur Constantin ar bras
 ac a lesas ar Christenien

da derhel mat d'o guir lefen
 Goude maro an Autrou S. Lin
 oe Pap e Rom dre gras divin
 an Den fantel Melchias
 choafet gant Doue dre e gras
 Ennez en defoa confacret
 gunael Efcop er Yeaudet
 e anvas ilis Cathedral
 e c'houde dan Disquibien a'l.
 Pa oe gunael confacret
 Efcop ebars er goz-Yeaudet
 e commançaz lemel er mez
 an idolet eus an tyez
 Hac ober cavet en pep ty
 un imaig eus ar Crucin
 ar Verchez, ar famil fantel
 portrejo ol an Ebestel
 Nombri bras a Efqueb so bet
 en Lexohi, er gos Yeaudet
 daoufee Efcop a triguent
 herve raport bue ar sent
 Sant Tualive sot bet
 Efcop ebars er gos Yeaudet
 Sant Hogmel, a Sant Ruelen

ac un nombr bras a Sent oufpen
 Hoeh bla a triuguent eo bet
 San Tual Efcop er Yeaudet
 Han eno é oue interret
 gant pep honor a pep respet
 Goude é euren miraclou
 ma vo favet é Relegou
 ar tele a que fauvecet
 pa oue Lexobi diftrujet
 a oue diftrujet Lexobi
 oa Caranus Efcop enni
 er bla mil seis cant un an a seis
 herve raport hiftor Breis
 Hafterin a deuas gant Liftri
 a Danmarc da Lexobi
 hac en deus-y affieget
 gant pevar mil a Soudardet
 Na omis e oue ganté
 o clafq abordi varnefe
 pa n'illi quet antren enni
 en deus concluet he devi
 An Habitantet eus a guer
 pa en eum voelent en danger
 en deus fonjet en eum renta

000028

en esperans trentin gantan

Asterin an Tirant cruel

evel ma antreas en Quer

a commanfas da vassacri

ar chrissenien dre m'oc'hifi

Goude e pillas an oll vadou

deus an ilis an tenforieu

nenert Relegou Sant Tual

éc'h ejont oll gant an dud fal

A re-se a oue fanveteet

da Chartre en Boce é ouen casset

gant en Escop s. Caranus

evel miracl dre gras Jesus

A Dol é teuas, un armé

da cber de mont ahané

mas allas pa int aruet,

e oa Lexobi distruet

Goude Caranus a varvas

er guer a Frans é decedas

ac é chomas ar Gos-Jeaudet

neufe ep caet Escop ebet

Ar Pains Mor en Roue en Dol

pa ouelé an Escopti o col

a hanvas Gratien Escop

en Treguer da gouarn é bopl

Gratien a oulennas neuse
 permission ous ar Roue
 da chang a plas dé Escopti
 pa oa diltrujet Lexobi

Accordet oue defan ar c'hras
 en Couent Trecor é chomas
 peini , hervé ma lenner
 oa commanfament Landreguer

An Templ santel ar Gos-Iaudet
 a oe neuse abandonet
 mas Doue ne dourvêe quet
 é vijê da viquen dilefet

Inspiret oue an Autrou treguer
 da reformin an Templ santel
 en avantag ar Vretonet
 eo un tenfor caer ar Ieaudet

Heno ema ar guir sourcen
 a ne finisso birviquen
 grasso divin dimes an Eê
 evit ar c'horf ac an inê

Me ne citan miracl eber
 deus are so groet er gos Ieau let
 eur mis antier n'en deo netra

d'o raporti a d'o scriva

Er Ieaudet é eurs remejou
ep mar ous pep sort clevejou
ous pep danger a pep annui
preservet eo nep a deu dy

Mar re Doue d'ar c'horf yehet
dre gras ar Verbez ar Iaudet
é re boas d'an inco
remission d'ar pechejo

Indulgenço so accordet
perpetaire dar Gos Iaudet
a d'o gounit cals an amfer
pad ar mis Mae en antier

Nombr a grasso so accordet
dreist ar ploço all d'ar Iaudet
en pad eur mis cren ar pardon
demp da c'hounit remission

*Imprimet a nevez, dre eurz ar c'itoez
Gris, ulc' Avocat guichen Tribunal civil
membre conseil ar Sou - Prefectur e Lan-
non, A syndicatour chapel ar yeaudet,
commun P.oulec'h, Arrondissement Lan-
non.*